

Petra eo beza pagan, hugunod, schismatik ? — Ar baganed eo ar re n'int ket badezet ; an hugunoded a zo bet badezet, met na gredont ket kement tra a zesk d'imp an Iliz a-berz an Aotrou Doue ; ar schismatiged a zo tud hag a c'hall kaout eur gredenn vat ; met ne anavezont ket evit mestr hon Tad Santel ar Pab.

GERIOU. — Ali, kuzul, conseil, avis. — Barn, juger ; eur varn, un jugement. — Ar pezh a garfet, a garot ; a c'houlennfet, a c'houlennot. — En askont, abalamour ; o par, semblable, pareil, égal. — Dipar, sans pareil, sans égal, extraordinaire, très beau, très grand. — Krouadur, créature, enfant.

— Kleze, eur c'hleze, un glaive, une épée. — Micherour, ouvrier, artisan. — Levenez, joie. — Laouen, joyeux. — Lidou, cérémonies. — Koabrenn, nuage, nuée. — Mennout, vouloir. — Mennad intention, désir. — Ar mennerez, la volonté. — Darempredi, fréquenter. — Rouantelezh, royaume. — Kêrbenn, capitale. — Rummad, catégorie, troupeau, tribu. — Lignez, descendance, lignée. — Ren, conduire, diriger, gouverner. — Kenderc'hel, continuer, me a gendale'h. — Kinnig, offrir ; o kinnig koueza, menaçant de tomber. — Belegiaj, belegiez, prêtrise, sacerdoce. — Kelennadurezh, instruction, enseignement, renseignement, doctrine. — Furnez, sagesse. — Gouestla, consacrer, vouer.

SONIOU TAD-KOZ

AR JISTR

— Tec'het an hanv, gant e domder, mabig, Ha distro d'imp ar c'hoz-amzer ; Noaz-pilh brankou mamm ar c'hizier(1).
— Met er park bras, a-drek d'an ti, tad-koz, Ar gwe a bleg war an irvi, Gant avalou o tarevi.
— troc'homp eur wal kelve fourchek, Hag hon daou a-dreuz d'ar souleg, Deomp war du an avaleg.

**

Eur beskod kloz ouz an alar ; Gwe branket betek an douar, Hag avalou puilh ouz pep bar.

Avalou ru, avalou gwenn, Avalou glas ha re velen, Re vihan, re vras ha re grenn.

Tad-koz o floura gant e wall : « Ar bloavez, 'mezan, vo ket fall, Jistr 'n eun tu, bara en tu all.

« Pa deuy ar goanv, ni a zebro, 'N eur domma ouz ar skod dero, Bara gwiniz gant jistr c'houero.

« Aman eun aval eostek dous ; Gonde eiz devez war ar plouz, Henez a rey d'imp jistr c'houermous ;

« Mar gouzomp, arôk, 'n eur c'horn klenk, Kemmeska an dous gant an trenk... Seurt-se lakay pôtrez 'n o renk !

« Sell hi, rouanez an dachenn, Eun aval flour, ru e groc'henn, Evel dioujod eur verc'hodenn.

« Tomm d'ar penn ha dous d'ar geno, Me lavaro d'it e hano, Aval Eva, war ma meno. »

**

Kutuillet holl diwar bep bod, Aet int d'ober avalou blod, Da c'hortoz mont dindan ar rod.

El leur, ouz penn ar bern kolo, Eul lec'hig klenk, kloz ha distro, Ouz pep gwall-darvoud o miro ;

Ouz ar vioc'h du hag ouz he leue, Ouz ar walc'h beg melen ive, Hag ouz ma c'hanfard, marteze ?

Eno, an eil ouz egile, E tarefont holl de ha de... Ni yel' d'o gwelet bep beure.

Eun deiz, — da lagad a lugern ! Tad-koz, o sellet ouz ar bern, A lâro : Avalou d'ar gern !

Tôlet er gern an aval mistr, Dindan ar rod ar gwad a flistr ; Breman souden hon devo jistr.

— Patrig ! Patrig ! pôtr ar jistr dous, M'ho kwel du-hont 'n penn ar bern [plouz ;

Na da betra ho korzenn rous ?

— Bremaik, tad-koz, pa redo Ar jistr mat diouz an avalo, Gant ma c'horzenn me hen evo.

War dôl ar wasg, pleget e benn, Barz ar waz jistr beg e gorzenn, E karg dinec'h e damm teurgenn.

Ar jistr a beg war e dal gwenn E vleo fuilhet, e vleo melen. Met e galon a c'hoarz laouen...

— Awalc'h breman, pe hon do kroz, Rak me 'wel o tonet mamm-goz, Seblant ganti da vala groz.

Nann, arabat mont betek re ! Warlerc'h jistr dous, gwechou a ve, Warlerc'h jistr dous, e ve kerse !

T. K.

(1) An halegenn.

Nebeut a nebeut, 'Z a e ludu ar bern keunend.

Ma fell d'it dastum madou, Pa lammi unan, laka daou.

Gwell eget komz eo skouer vat : Ar bugel a sell ouz e dad.

(Kannad Panvrid).

Kentan gwregig am oa bet Mari Sourig oa hanvet ; Kentan tra devoa gwerzet Oa he c'houef triouec'h gwenneg ; Ha ma lâre c'hoaz neuze : « Tri chopinad 'm o gantê ! » Gwerzet he deus ma bioc'h gell, Ma gwiz vras ha ma forc'hell ; Aet int tout gant an ostizez... Ma malloz d'ei, afronterez !

Me 'm eus eun den bihan drouk Hag eun tortig war e choug.

Evitan da veza tort, Bezan 'n eus madou a bep sort ;

Bezan 'n eus kannab ha lin, Hag ed da gas d'ar vilin ;

Bezan 'n eus lin ha kannab Hag ed da gas d'ar marc'had.